

# NIDIAD

Priz : 5.00€



Genver 2011



Niverenn 5



Trugarez da :

Guy Étienne

Evit ar skoazell en deus kaset dimp.

## "Providence"

Mar baleer e bered Providence er Stadoù-Unanet e Karimp ur maen-koun eus an ishisad, savet e Kriz ar c'hlezeal.  
 "Howard Phillips Lovecraft" a c'haller lenn warni :  
 "August 20 1890 - March 15 1937". Hag, en treset, war-lerc'h an deiziadoù, e Karimp ul lavaran skous, "I am Providence".

H.P. Lovecraft a voe ganet e Kar Providence, e Rhode Island. Soubet, bezañ, lezennet, gwel gasat, kizallet, savet ha desavet dimmet e voe Lovecraft e mab, onzalc'hioù, ersajioù, apertioù, boazioù, enveranoù kar Providence. Ar ger-se a brofes d'ar skingner, ur sell, ur don, ur blienn, ur floc, ur disp. E Providence ne gavas ket pramesaoù un hendrouganer evel Athanasios Aleksandria - herañ a huchas, kentvedoù a-mok ma voe adkizallet gant Mab den un tamm douer gret maen, deuet da vezañ maen-koun Lovecraft, pamilavurenn "I am Providence". Ne gavas ket, dindan an am, un don daeet war vad mision an den. Ne gavas nag orzh na sloc. Na pavez na fahoud. Na treset na didrach. Nemet ur vored. Nemet keladurioù ha c'hoarzh lavaran Athanasios, ul lavaran oc'h ober goap deuit dirasañ. "I am Providence".

"Me eo Providence" a c'halle lavaret Lovecraft. "Me eo, gwr sammad an dizurzh ha breuz da vad. Me eo ar ger den war ar bed. Un don stardus ha kreuz eo. Krenañ a ran direk ar bed e'm skridoù, e'm soñjoù, e'm diwanoù tummet, e'm c'hasoù. E'm skridoù a Krenañ. Krenañ a ran eut ar bed. Lavar ar bed on, ul lavar gret Kouf ha gret Kêr".

"I am the real hand. I am the only Providence. I am Providence."  
 Kinnig a rimp, en hon limennoù hag a gerioù Lovecraft, pourmenademañ en a stadoù a noz, divaleademañ a fizia herañ tort tra kaminigellik, baleademañ skizetus a vizo ha freid hag ho soñjoù, kerzhademañ war c'hoatinn er vored a Rhode Island. Ul vored kallet ha kaset. Baleomp e stadoù lavar Providence.

Midiad

## Krennva

Niverenn arbennik : H.P. Lovecraft


I. Buhezskrid .....	P.5
II. Aer gouyen .....	P.6
III. Sonerezh Erich Zann .....	P.13
IV. LAM-NE1-PE3-HWARD1 .....	P.20
V. Arroud eus <i>Supernatural Horror in Literature</i> a-zivout oberenn William Hope Hodgson .....	P.28
VI. Diglevet .....	P.31

Goloenn ha skeudennoù : Antoine Piers  
Pajennaosañ : Antoine Piers ha Hoel Mahe

### Strollad Skridaozerezh

Malo Adeux  
Hoel Mahe  
Gwendal Piégais  
Antoine Piers  
Ronan Le Déroff

## Howard Phillips Lovecraft



Ganet eo Howard Phillips Lovecraft d'an 20 Eost 1890 e Providence, ur gêriadenn vihan e-kichen Boston, Rhode Island. E dad, Winfield Scott Lovecraft, un den a zere izelek, en devoa ul levr aoeg frank ma plije da Lovecraft ehanañ. E vamm, Sarah Susan Philips, oa ur vaouez a ziagentiezh saoz. Mervel a reas e miz Mae 1921.

Krouet en deus Lovecraft «Mojenn Cthulhu», hervez tro-lavar August Derleth. Hogen, biskoazh n'en deus hennezh arveret an dro-lavar-mañ. Hollwashaer, don ha dichek eo e labourioù. Kavout a reont abeg e Kantved ar Sklerijenn, ar Romantelouriezh hag an denelouriezh kristen.

C'hoarvezout a ra e oberennoù a gevelennoù dreist holl hag eus un nebeud romantoù. E-touez an oberennoù brudetañ e c'haller menegiñ *The Colour out of Space*, *The Call of Cthulhu*, *The Dunwich Horror*, *The Whisperer in Darkness*, *The Shadow over Innsmouth*.

Sellet eo Lovecraft evel unan eus ar skrivagnerion spont gant al levezon vrasañ, a-gevret gant Edgar Allan Poe. Stephen King a lavaras diwar e benn e oa "dorn-wezhour brasañ kevellenn euzh klasel an ugentvet kanvet".

*Hoel Mahe ha Malo Adeux*

## Aer gouyen

Goulenn a rit diganin displegañ perak e 'm eus aon rak ur red avel gouyen ; perak e kriidiennan muioc'h eget neb all en ur vont tre en ur sal yen, hag e hañvalan bezañ doñjeret hag argaset pa sil riv an abardaez a-dreuz tommder un devezh klouar a ziskar-amzer. Bez' ez eus ar re a lavar ez on kizidik ouzh ar yenijenn evel ma vez tud all ouzh ur c'hwezh fall, hag an hini diwezhañ on da nac'h ar santad. Ar pezh a rin a vo danevellañ an degouezh euzhusañ a 'm eus biskoazh buhez, hag ho lezel da varn hag un displegadenn dereat a c'haller pe get reiñ dre se da 'm dibarded.

Ur fazi eo faltaziañ ez eo liammet dizirouestl an euzh gant an deñvalijenn, an didrouz hag an digenvezder. E stadañ a ris e sked trellus un endervezh, e safar ur veurgêr hag e toufor mouest ul leti dister ha kozh, gant un ostizez difaltazi ha daou zen nerzhus e 'm c'hichen. En nevezamzer 1923 e 'm boa tizhet kavout ul labour bennak, melkonius ha displet, evit ur gelaouenn e kêr New-York ha, divarrek ma oan da baeañ feurm fetis ebet, e krogis da gantren eus an eil leti marc'had-mat d'egile war-lerc'h ur gambr a c'hallfe kenstrollañ perzhioù un naetadurezh dereat, arrebueri padus hag ur priz fur kenan. Buan e voe anat ne chome din nemet da zibab etre meur a zroug, hogen nebeut goude e tegouezhis er 14<sup>t</sup> Straed Kornog en un ti a 'm heugas kalz nebeutoc'h eget ar re a 'm boa arnodet.

Al lec'h oa un adeilad e krag gell, pevar solieradur ennañ, bet savet e dibenn ar bloavezhioù pergont evit doare, gant koadadur ha marmor a roe, dre o splannder dislivet ha saotret, kel eus un diskar diouzh kre'h ur builhentez vlizidik. Er c'hambrou, ledan hag uhel, kinklet gant paper dic'houzañvadus ha rizennoù stipet en un doare lu, e talec c'hwezh mantrus al louediñ ha mogedenn ur c'heginerezh amspis. Hogen, naet oa al leurioù, a-zoare al lien, hag an dour tomm ne veze ket re alies aet yen pe sac'het, ken e teuis da soñjal el lec'h-se evel unan gouzañvadus da nebeutañ evit goañviñ betek un distro gallus d'ur vuhez wirion. An ostizez, Spagnolezloudour, hogos barvek, anvet Herrero, ne 'm enoeas ket gant teodadoù pegant pismigadennoù a-zivout va lamp tredan a chome enaouet diwezhat e 'm c'hambrou en trede solieradur ; ha va c'henfeurmerion oa ken sioul ha tavedek hag e c'haller c'hoantaat, o vezañ ma oant evit an darn vrasañ Spagnoled un nebeut a-us d'ar garvañ ha grosañ derez. Nemet tourni an tramgirri er straed izeloc'h oa ur gwir tregas.

Eno edon abaoe teir sizhun pa zegouezhas an darvoud iskis kentañ. Un abardaez, war-dro eizh eur, e klevis ur vrelinsadenn war al leur hag e ouezis a-greiz holl e oa c'hwezh put an amoniak a santen abaoe ur pennad. Dre sellout tro dro din, e welis e oa ar sel o tiverañ gant ar glebor ; an intradur, war a hañvale, oa kroget en ur c'horn eus ar vogder dal. C'hoanteke da herzel ouzh ar reuz en e andon, e hastis d'ar

c'hav a-benn kontañ an darvoud d'an ostizez, a ziogelas din e ve diskoulmet buan ar gudenn.

"An doktor Muñoz", a huchas hi o pignat a-herr gant an diri, ha me d'he heul, "en deus skuilhet e aozadoù. Re glañv eo d'ober war e dro e-unan — klañv ouzh klañv atav — met n'en deus c'hoant eus skoazell all ebet. Iskis kenan eo en e gleñved — a-hed an deiz e vez o kibellañ en ur dour dezhañ ur c'hwezh souezhus hep dont a-benn da zivorzañ pe da dommañ. Kempenn e stal a ra e-unan, leun eo e gambr vihan gant boutailhoù hag ijinennoù, ha ne labour ket war e vicher. Hogen un den dreist e voe gwechall — va zad e Barselona en doa klevet komz anezhañ — ha n'eus ket pell en deus renket e vrec'h d'ar plomer bet gloazet trumm. Ned a morse eus an ti, nemet war an doenn, ha va mab Esteban, eñ a gas dezhañ e voued, e lien kannet, louzeier hag aozadoù kimiek. Va Doue, an hal amoniak a ya gant an den-se da chom er yenijenn !"

An It. Herrero a steuzias en diri war-du ar pevare solieradur ha distreiñ a ris da 'm c'hambrou. Beradur an amoniak a baouezas hag e-pad ma oan o naetaat pezh a oa bet skuilhet ha ma tiguren ar prenestr da avelañ, e klevis an ostizez o stampañ a-us din. Ken sioul ha ken mout e oa kammedoù an doktor Muñoz ma ne 'm boa biskoazh klevet trouz digantañ, nemet sourr ur wikefre strilheoul. E-pad ur mare ez emc'houlennis peseurt glac'har iskis e c'halle bezañ hini an den-mañ : daoust hag ar bennegezh da nac'h pep skoazell diavaez ne zeue ket kentoc'h diwar ur brizherezh disol ? Soñjal a ris, da heul al lavar boutin, en anc'hloaz divent a vez e stad un den eus ar vegenn diskaret ken izel.

Marteze ne 'm bije morse anavezet an doktor Muñoz hep ar barrad kalon a grogas ennon a-greiz holl d'ur beure m'edon o skrivañ, azezet e 'm c'hambrou. Mezeion o doa komzet din eus ar resmiadoù-se ha gouzout a raen ne oa ket amzer da goll. Neuze, o kounaat ar pezh he doa lavaret an ostizez a-zivout skoazell ar c'hlañvour d'ar micherour gloazet, e savis a-ruz korf gant an diri hag e stokis dinerzh ouzh an nor a-us da 'm hini. Respontet e voe da 'm stokadenn en ur saozneg flour gant ur vouezh iskis o tont pelloc'h a zehou, o c'houlenn va anv ha petra a felle din. An traoù-se disklêriet, ez eo an nor e-kichen a welis o tigeriñ.

Ur gaouad aer gouyen a 'm degemeras ; ha daoust d'an deiz-se bezañ unan eus ar red dommañ e dibenn Mezheven, e kriidiennis d'an ampoent ma tremenen an treuzoù evit erruout en ur rann di e'hon a 'm souezhas dre e ginkladur pinvidik ha blizidik en neizh-mañ a zienez hag a druilhegezh. Ur gwele pleg o talvout da c'hourvezvank war an deiz hag an arrebueri en akajou, an tennerisoù meurdezus, an taolenoù kozh hag an estell herouedet, pep tra a hañvale bezañ graet diwar vuzul evit studioù un aotrou kentoc'h eget evit gambr ul leti. Neuze e welis edo ar gambr-mañ — « ar gambr vihan » gant boutailhoù hag ijinennoù bet meneget gant an It. Herrero — dres

a-us da 'm hini hag e oa anezhi arnodva ar mezeg, na mui na maez ; stok outi edo ar sal lijorek a dalve dezhañ da annez pennañ, gant kombodoù hebleustr hag, e-kichen, ar sal dour ec'hon ma c'halle kuzhat kement listrier ha traezenn a vije feukus d'ar sell. An doktor Muñoz, a dra sur, oa un den a renk uhel, ur spered stuziet ha poellek.

Bihan oa ar stumm dirazon, hogen heneuz un drugar, gwisket furmek a-walc'h en un dilhad kement klok dioutañ. An dremm vrientin, dezhi un eztaol aotrouniek met hep rogoni, oa fichet gant ur barv berr, fonnus, glas houarn. Gwarezet oa an daoulagad du ha bliv gant ur *pince-nez* giz kozh war ur fri skoul a roe un tres afrikat d'un dremmadur a oa, a du 'rall, keltiberiat dreist holl. Blev stank ha krennet kempenn o reiñ kel eus gweladennoù ingal ur barver oa rannet a-us d'un tal uhel ; er skeudenn en he fezh e rene ur veizegezh heverk ha dreisted ar gwad hag an hil.

Neoazh, pa welis an doktor Muñoz e gouyender ar fourrad-se e santis un doñjer na c'halle bezañ kantreizhet gant netra en e zoare. E nead tuet d'an disliv ha yenijenn e stok nemeto o dije gallet reiñ sol loue da seurt santad, ha kement-se zoken a 'm bije digarezet mar bije bet gouezet pegen klañvidik oa an den. Ar yenijenn digunvez eo marteze he doa graet din kizañ ; rak anreol oa seurt riv dre un deiz ken tomm, hag an anreol a enaou atav erez, disfiz hag aon.

Hogen, buan e troas an doñjer da edmeg pa zeus anat din ampartiz vras ar mezeg iskis, en desped d'e zaouarn krenus, yen skorn ha diwad da welout. Meizañ a reas prim ha sklaer va ezhommoù ha bastañ dezho gant mailhoni ur mestr, en ur ziogetiñ gant ur vouezh espar, gouluzet kaer eviti da vezañ goloet ha dihangren, e oa eñ ur stourmer ken taer ouzh ar marv m'en doa kaset e c'hlad d'ar strad, kollet e holl vignoned ha graet a-hed e vuhez imbourc'hioù eston evit luziañ ha kas e enebour da get. Un dra bennak ennañ a zegase da goun ar baraneg madelezhus ; randoniñ a rae evel ur glabouser e-pad ma selaouenne va bruched ha ma veske loaiadoù louzeier azas a oa aet da gerc'hat en arnodva bihan. Anat, kavet en doa kompagnunezh un den a-zoare, nevezenti dibaot en ur metou ken kramennek, ha douget oa d'ur prezeg divoas gant lanv e enevorioù stag ouzh deizioù gwelloc'h.

E vouezh, hag hi direol, oa peoc'hus da nebeutañ ; ne c'hallen ket zoken merzhout e anal e-pad ma tibune frazennoù flour en un doare kourtes. Klask a rae treiñ va spered diwar va gwaskad dre gomz eus e zamkaniezhoù hag eus e arnodoù ; koun 'm eus c'hoazh eus an evezh a lakae en e brepozioù frealzus a-zivout va c'halon wan, pa haere e oa kreñvoc'h ar youl hag ar genskiant eget ar vuhez vevedel he unan. Evitañ e talveze e c'hell ur c'horf frammet yac'h ha diwallet aketus diwar an deroù, ha gant ma ve kreñvaet e berzhioù dre ar skiant, mirout ur meni bividigezh navel daoust d'ar gwanderioù grevusañ, d'an nammoù, pe zoken d'ar spanaennoù e stellad organoù spesadel 'zo. Tu a ve dezhañ, a lavaras din dre zamfent, da zeskiñ din deiz pe zeiz bevañ — pe ac'hoel piaouañ ur bezoud kenskiantek bennak — hep kalon ebet

! Evitañ, reuziet e oa gant ur rouestlad kleñvedoù o doa ezhomm eus un hanren resis kenan a endalc'he ur yender arstalek. Nep gorren merzhadus eus ar gwrezverk a c'hallfe, mar be padus, e dizhout en un doare dizistro, hag arzalc'het e oa freskadurezh e annez — war-dro 55 pe 56 derez Fahrenheit — diwar-bouez un trevnad yenaat dre zesunañ amoniak. Bez' e oa ar c'heflusker strilheoul a gleven alies ar pompoù anezhañ e 'm c'hambur dindan.

Disammet en ur par ken berr diouzh va gwaskad, e oan aet da ziskibl feizek ar penitiour donezonet pa guitais e lojeiz sklask. Da heul an darvoud-mañ ez is d'e weladeniñ alies, hep ankouaat bezañ gwisket tomm. E selaou a raen e-pad ma komze eus imbourc'hioù kuzh hag eus disoc'hoù hogos euzhus, ha daskrenañ un tamm pa sellen ouzh an astelladoù levrioù kozh hag ankendivizat, ur souezh ! Mat eo din ouzhpennañ e voen erfin hogos pareet, ha da vat, diouzh va c'hleñved a-drugarez d'e arouelioù ampart. War a hañval ne rae ket fae war darganoù ar grennamzerelourion, rak hervezañ e veze miret el luzonoù rinek-se fraouadoù bredel rouez a c'hallfe kaout gweredoù dibar, hogen meizadus, war zanvezenn ur reizhiad navel aet diouti ar poulzadennoù bevedel. Fromet e voen gant danevell e arnodoù kentañ, en doa rannet gant an doktor Torres, eus Valencia, den oadet a reas ingal war e dro pa vanas klañv bras eitek vloaz kent, gant strafuilhoù padek da heul. A-vec'h e oa saveteet e genvreur ma voe an embregour enoradou, goude stourm ouzh an enebour kriz, trec'het gantañ. Marteze e oa bet re vras an tennder, rak an doktor Muñoz a zisklerias din a vouezh izel hep mont dre ar munud avat pegen dreistordinal e oa bet an hentennoù parañ, pa rekizent lec'hioù hag araezadoù gwelet fall gant kozh c'halenourion virelour.

Bep ma tremene ar sizhunioù e verzhis gant keuz e oa va mignon nevez, goustad met anat, o koll krog war e gorf, evel ma oa bet damveneg gant an Lt. Herrero. Staenet holl ez eas e zremm, goloetoc'h hag amfraeshoc'h e vouezh, ha displeberetoc'h kenurzhiadur e fiñvadoù kigennel. E spered hag e youl a ziskoueze koll gweinded hag intrudu. Ne hañvale e mod ebet bezañ dic'houzvez eus ar c'hemmoù trist-se hag ar gwenvrazh spouronus a aloube tamm ha tamm e zremmvez hag e brezeg, a enaouas ennon adarre ne ouzon petra eus an heug steuzidik a 'm boa santet en deroù.

Tizhet e voe gant froudennoù iskis ha dalc'het gant un doug d'an temzoù arallhin ha d'an ezañs egiptat, ken ma renas en e gambr ur c'hwezh evel hini bez ur Faraon e Traonienn ar Rouaned. War un dro e kreskas e ezhommoù aer yen ha gant va skoazell ez astennas ar sanelladur amoniak en e gambr, hag e taskemmas pompoù ha porzherez e ijinenn yenaat betek gallout derc'hel ar gwrezverk ken izel ha 34 derez pe 40 derez hag erziwezh 28 derez zoken. Ar sal gibellañ hag an arnodva ne oant ket ken sklask, anat, pa oa ret diwall diouzh skornadur an dour ha chanadur an argerzh kimiezhel. E harpañ a ris, pa glemmas ar feurmer amezek war an aer sklask a sile dre

an nor etre o div gamb, da stigmañ tennerisoù tev evit paraat ouzh an diaester-se. Pozitet mui ouzh mui, war a hañval, gant ur meni euzh stultennus ha kleñvedek, e komze dibaouez eus ar marv, o c'hoarzhin glas avat pa veze a-vec'h meneget traoù evel aozañ un douaradur pe prientiñ obidoù.

En holl d'an holl, e teuas da vezañ ur c'henseurt abafus, skrijus zoken ; koulskoude, trugarek ma oan outañ evit bezañ va fareet, ne voen ket evit e zilezel gant an estrenion a rae war e dro hag e taolen pled, kafunet en ur vantell hir ha tev a 'm boa prenet a-ratozh evit an degouezh, da ziboultrennañ e gamb ha da vastañ d'e ezhommoù pemdez. An darn vrasañ eus e brenadennoù a raen ivez hag abaf e vanis, stanket va anal, pa welis lod eus an aozadoù kimiek a urzhiade digant apotikerion pe pourvezerion arnodvaoù.

Evel un aergelc'h spouron, bras ouzh bras hag andisplegatus, a savas en dro d'e lojeiz. Ar c'hendi a-bezh, evel a 'm eus lavaret, oa gantañ c'hwezh al loued ; gwashoc'h avat oa hini e gamb, ha kement-se daoust d'an holl ezañs ha temzoù, ha d'an aozadoù put a lakae en dour a-raok kibellañ, pezh a rae dibaouez bremañ, o nac'h groñs bezañ skoazellet. Merzhout a ris eno ul liamm gant e glañvadur, ha skrijañ o soñjal er seurtad klañvadur e c'halle bezañ. An It. Herrero a rae sin ar groaz pa selle outañ, hag e fiziout a reas ennon krenn ha krak. Ne lezas ket zoken he mab Esteban da genderc'hel gant ar c'hefridioù evitañ. Ar vrouez a save er gouzañver, bewech ma raen anv eus mezeion all, a bade keit ha ma krede he magañ. Aon en doa anat rak gwered ur fromad taer war e gorf, hogen brasaat kentoc'h eget bihanaat a rae e youl hag e nerzh luskus, ha nac'h a reas chom war e wele. Skuizhnez devezhioù kentañ e gleñved a lezas al lec'h gant an distro d'e vennad entanet, ken m'edo war-nes dichekañ an ankou pa oa dres an enebour kozh-mañ o kregiñ ennañ. An disterañ a zebre, seller gantañ a-vepred evel ur furmelach, a zilezas koulz lavarout ha ne voe salvet diouzh ar falladur hollek nemet dre nerzh e veizezh.

Ar boaz a gemeras da skrivañ ne ouzon petore teulioù hir, siellet aketus gantañ, o reiñ din an urzh groñs d'o zreuzkas goude e varv da dud 'zo a venegas dre o anv. Indeziz lennek evit an darn vrasañ, nemet e oa ivez hini ur mezeg gall brudet gwechall, marv a-benn bremañ war a greded, hag a veze hiboudet diwar e benn an traoù anvezadusañ. Evit gwir e 'm eus devet an holl deulioù-se hep o daveiñ nag o digeriñ. E neuz hag e vouezh a zeuas da vezañ ur gwir spouron hag e vezañs hogos dic'houzañvadus. Un deiz e Gwengolo, ur spurmant dic'hortoz anezhañ a voe arbenn d'ur barrad droukfell gant un den a oa deuet da ratreañ lamp tredan e vurev. Aketus e voe da chom en disgwel e-pad ma save un erskrivad efedus. An den-se, souezhusat tra, en doa treuzet braouac'hoù ar Brezel Meur hep bezañ gouzañvet spouron ken don.

Neuze, e kreiz miz Here, euzh an euzhoù a c'hoarvezas gant un trumnder sabatuus. Un noz, war-dro unnek eur, e chanas pomp an ijinenn, ken ma paouezas argerzh ar yenaat dre amoniak a-benn teir eurvezh. Gourgalvet e voen gant an doktor Muñoz a daolioù troad war al leur, ha kiañ a ris ouzh al labour evit ratreañ an ijinenn e-pad ma jarnee va amezeg gant ur vouezh dezhi son ar goullou, divuhez ha ronkellus, dreist pep deskrivadur. Va strivoù amatour, koulskoude, a voe poan gollet, ha goude emelladenn ur mekanikour a oan aet da glask en ur c'hardi amezek digor a-hed an noz, e ouejomp ne oa tra d'ober nemet gortoz ar beure evit pourchas ur vountell nevez. Ken bras, ken chin e voe neuze konnar hag aon ar penitiour toc'hor ma kinnigjont breviñ e gorf gwanaet. D'un ampoent, un andag en redias da bladañ e zaouarn ouzh e zaoulagad ha da dec'hout d'ar sal dour. Distreiñ a reas a-dastorn, e zremm lienet start, ha biken ken ne welis e sell.

Yender ar rannidi a zigreske ent hewel bremañ. War-dro 5 eur ez emdennas ar mezeg er sal dour, o kemenn din pourveziñ reoliek dezhañ an holl skorn a c'hallfen pourchas er stalioù ha kafedioù digor a-hed an noz. Bewech ma tistroen eus va zroioù, digalonekaus a-wechoù, ha ma tisammen va sac'hadoù dirak dor serret ar sal dour, e c'hallen klevout en tu all ur bourbouilh aheurtet hag ur vouezh raoullet o koagal an urzh-mañ : « Muioc'h — Muioc'h ! ». Erziwezh e c'houlouas un deiz klour hag e tigoras ar stalioù unan hag unan. Goulenn a ris digant Esteban va skoazellañ, o kinnig dezhañ kerc'hat ar skorn e-pad ma pourchasfen ur vountell bomp, pe urzhiañ ar vountell e-pad ma kendalc'hfen gant ar skorn. Hogen, kenteliet gant e vamm, e nac'has groñs.

A-benn ar fin e c'hopris ur straner gwisket teuc'h, a 'm boa kavet war va hent e korn an 8t Bali, evit derec'hel da bourveziñ ar gouziviad gant skorn ur stal vihan ma 'm boa e genouezet. Stagañ a ris gredus gant an trevell kavout ur vountell bomp hag emfredañ micherourion barrek a-walc'h d'he stalioù. Hogen d'an trevell ne welen fin ebet ha fuloriñ a raen hogos ken feuls hag ar penitiour o welout an eurvezhioù o vont hebiou e-pad ma reden, hep tamm na rank, da bellgomz en aner nouspet gwech ha da glask d'illo a lec'h da lec'h, amañ hag ahont, dre riboul ha tramgarr. War-dro kreisteiz e tegouezhis e kreiz-kêr dirak ur stal bourveziñ azas hag un hanter eur goude, well wazh, ez erruis da 'm lojeiz gant ar stalabard ret ha daou vekanikour bagol ha speredek. Graet 'm boa va seizh gwellañ ha spiet bezañ e koulz.

Diaraoget e oan bet avat gant ur braouac'h hud. Edo an ti er brasañ fourgas ha dreist da ragach ar mouezhioù aonet e kleven un den o pediñ gant ur vouezh vout. Un dra diaoulek a blave hag ar feurmerion a zibune o chapeled abaoe m'o doa klevet ar c'hwezh deuet dre zindan dor serret ar mezeg. Al landreant a 'm boa enfredet oa tec'het, hervez, o yudal, skoelf e zaoulagad, nepell goude e eil deroad skorn, marteze diwar e rannelled reñverek. Ne c'halle ket, evel just, bezañ prenet an nor war e

lerc'h. Hogen, serret e oa bremañ eus an diabarzh hervez doare. Ne oa eno trouz nemet hini un argarzh beradur gorrek, ha ponner.

Aliañ a ris an daou vicherour, goude komz un nebeud gant an It. Herrero ha daoust d'an aon a grigne va c'hreiz, da derrañ an nor. Hogen an ostizez a gavas an tu da dreñ an alc'houez eus an diavaez diwar-bouez ur wikefre orjal. Diagent hor boa digoret dor an holl gambrou all en trepas-se ha digoret frank an holl brenester. Neuze, gwarezet hon fri gant ul lien, ez aloubjomp en ur greñañ kambr villiget ar su, a splanne gant heol tomm an deroù endervezh.

Un doare roudenn du ha gludek a gase eus dor digor ar sal dour da zor an trepas hag alese d'ar burev, ma chage en ur poullad euzhik. Un dra bennak oa skrabadennet eno gant ar c'hreion, en ur skritur disneuz ha skoanet, war un tamm paper bastrouilhet divalav evel pa vije bet diwar ar c'hrabanou o doa merket gant mall ar gerioù diwezhañ. Pelloc'h e kase ar roudenn betek ar gwele hag eno ez echue en un doare anlavaradus.

Pezh a oa, pe a oa bet, war ar gwele ne c'hallan ket ha ne gredan ket lavarout amañ. Hogen, setu pezh a zaslennis, o kridiennañ, an tamm paper bastrouilhet ha pegus a-raok kemer ur skloenn hag e zeviñ, ken na chomas anezhañ nemet un regezenn straklus ; pezh a zaslennis, spouronet, tra ma tec'he pennfollet an ostizez hag an daou vekanikour diouzh ti an ifern evit mont da valbouzañ o istorioù digempoellerc'homiserdinesañ. Hogodigredaduseoagerioùken doñjerusdindanked alaourek an heol-se, gant storlok ar c'hirri hag ar sammorelloù war ar 14<sup>th</sup> Straed leun a dud o safariñ. Anzav a ran neoazh e kredis enno neuze. Ha kredin pe get a ran enno bremañ, e gwir ne ouzon ket. Gwelloc'h eo na brederiañ war draoù 'zo, ha kement a c'hallan lavarout eo e 'm eus kasoni ouzh c'hwezh an amoniak hag e vezan war-nes semplañ gant ur red avel gouyen divoas.

"An dibenn", a lavare ar skrabadenn hakr-se, "zo amañ. Skorn ebet ken ... tec'het eo ar paotr p'en deus sellet. Tommoc'h bep munutenn, ar gwiadoù ne c'hellont derc'hel ken. Anaout a rit, a gav din, ... pezh a lavaren a-zivout ar youl, an nervernoù ha mirerezh ar c'horf goude m'o deus an organoù paouezet a arc'hwelañ. Damkaniezh vat e oa, ne c'halle ket derc'hel dibenndermen avat. Bez' e voe un disleberadur pazennek na 'm boa ket rakwelet. An doktor Torres a ouie, met lazhet e voe gant ar bleuz. Ne voe ket evit gouzañv pezh en devoe d'ober ... va c'has en ul lec'h iskis ha teñval d'ober war va zro, ha va lakaat sampar. Biken ken avat ne arc'hwelfe an organoù. E 'm doare ... ar mirerezh kalvezadel ... e ranke bezañ graet, rak setu bremañ eitek vloaz ma 'z on marv."

*Troet diwar ar saozneg gant Malo Adeux hag Alan E. Ar Berr.*

## Sonerezh Erich Zann

Gant an aked brasañ e 'm eus arsellet kartennoù ar gêr, padal biskoazh ne 'm eus kavet ar Rue d'Auseil en-dro. Ne oa ket kartennoù arvez hepken eus ar c'hartennoù-se rak gouzout a ran e kemm an anvioù. Er c'hontrol, imbourc'het don 'm eus holl hendraezoù al lec'h hag ergerzhet va unan pep rannbarzh pe forzh peseurt anv gouest marteze da glotañ gant ar straed a anavezen evel ar Rue d'Auseil. Met daoust da holl ar pezh a 'm eus graet, e van mezhekaus an devoud ne c'hallan ket kavout an ti, ar straed pe zoken al lec'h adenn ma klevis, e-doug mizvezhioù diwezhañ va buhez paour a studier war an drabedoniezh er skol veur, sonerezh Erich Zann.

Ha freuzet eo va envor, n'eo ket ur goulenn evidon, en abeg ma voe va yec'hed, korfel ha speredel, gwall drubuilhet a-hed ar marevezh ma annezis er Rue d'Auseil. Degas a ran e koun ivez ne gejis ouzh hini ebet eus an nebeud anaoudegezhioù a 'm eus eno. Hogen sebezus ha strafuilhus war un dro eo an devoud ne c'hallan ket kavout al lec'h en-dro dre ma oa un hanter eurvezh diouzh ar skol veur ha ma oa dibarek dre esparderioù a c'hallfent diaes a-walc'h bezañ disoñjet gant forzh peseurt hini a ve bet eno. Biskoazh ne 'm eus kejet gant un den en deus gwelet ar Rue d'Auseil.

Ar Rue d'Auseil a emled a-hed ur stêr deñval riblet gant etrepaoezoù o frenestroù mopedet savet e brik plom ha treuzet gant ur pont tolzennek e mein teñval. En amc'houlou e oa atav ribl ar stêr-se, evel pa ve bet moked al labouradegoù amezek o kuzhat an heol dizehan. Ar flerioù heugus a evode diouzh ar stêr ne 'm eus biskoazh o c'hwehaet e lec'h all ebet ; va skoazell a c'hallint un deiz d'he c'havout peogwir en o anavezin raktal. En tu all d'ar pont e oa straedoù enk, warno pavezioù ha houarnhentoù ; da heul e veze ret pignat, a-nebeudoù da gentañ, hogen serzh ouzh serzh a-feur ma veze dirazet ar Rue d'Auseil.

Biskoazh ne 'm eus gwelet straed all ken enk ha ken serzh hag ar Rue d'Auseil. Hogos un devenn oa, serr da nep karbed, o c'hoarvezout eus meur a lec'h a renkadoù a skalieroù hag oc'h echuiñ er gern anezhi gant ur voger uhel goloet gant illiav. Direol oa ar meinañ anezhi, o c'hoarvezout a-wechoù eus daroù maen, a-wechoù eus bili hag a-wechoù eus douar noazh, warnañ struj glas-louet o tispac'hañ. Bras oa an tiez, begek an toennoù anezho, kozh estonn hag o stouiñ war-gil, war-raok ha war-c'hostez en un doare dismantret. Bep ar mare, un daouad enebet, pep hini o stouiñ war-raok, a beuzkeje a-us d'ar straed evel ur volz ; hag a dra sur e virent ouzh ar gouloù a ziraez an douar a-is. Bez' e oa un nebeud aerbontoù etre tiez a-dreuz ar straed.

Annezerion ar straed-se a 'm skoas en un doare dibar ; en deroù e kredis e oa peogwir e oant holl dilavar ha tavedek hogen divizout a ris diwezhatoc'h e oa

peogwir e oant kozh kenan an holl anezho. Ne ouzou ket penaos e teuis da vevañ en ur straed evel houmañ met me va un ne oan ket pa zeuis amañ. E kalz lec'hioù paour e 'm boa bevet, skarzhet atav gant ar c'hoant arc'hant, betek ma teuis erziwezh en ti horjellus-mañ er Rue d'Auseil, dalc'het gant ar seizad Blandot. An trede ti adalek kern ar straed oa, hag a-bell an hini brasañ en o zouez.

D'ar pempet solieradur oa va c'hamb, an hini nemeti o vezañ annezet eno rak hogos goull o an ti. D'an noz ma erruis, e klevis ur sonerezh iskis o tont eus ar galatrez vegek a-us da 'm fenn hag an deiz war-lerc'h ez atersis Blandot kozh a-zivout kement-se. Lavarout a reas din e oa ur soner viola kozh, un iskis a zen mut a sine Erich Zann eus e anv hag a sone e-pad abardaevzhiadoù e laz seniñ ur c'hoariva marc'had mat ; ouzhpennañ a reas e oa c'hoant Zann seniñ da noz goude bezañ distroet eus ar c'hoariva an abeg nemetañ evitañ da vezañ dibabet ar galatrez uhel ha digenvez-mañ a oa ar prenestr talbenn unel anezhi al lec'h nemetañ ma veze gwelet ar voger oc'h echuiñ war diskenn hag an arvestva en tu all dezhi.

Diwar neuze e klevis Zann bemnoz ha daoust ma 'm dalc'he dihunet e oan moustret gant iskisted e sonerezh. Ne oan ket gwall stuziet war an arz-se ha koulskoude e oan asur ne oa liamm ebet etre e gendoniezh hag ar sonerezh a 'm boa klevet a-raok ; dre se e tezastumis e oa eñ ur sonaozer ijinus hag orinal kenan. Seul vuioç'h e selaouen, seul vuioç'h e oan boemet, betek ma tivizis, goude ur sizhunvezh, ober anaoudegezh gant an den kozh.

Un noz ma oa o tistreiñ eus e labour, e harzis ouzh Zann en trepas hag e lavaris dezhañ e plijfe din e anaout ha bezañ gantañ pa sone. Un den bihan oa, treut, krommet, e zilhaz uzet, e zaoulagad glas, e zremm chin heñvel ouzh hini ur gavdroadeg hag e benn peuzvoal ; hag, o klevout deroù va frezegenn, e hañvalas bezañ fuloret ha spontet en ur ser. Neoazh, habasket e voe erziwezh gant va doug karadek ha diskouezañ a reas din a-rekin e heuliañ en diri du, gwigour ha kamm, a gase d'ar grignol. E gambr, unan eus an div nemeto a oa er galatrez plantet serzh, oa war an tu kornog, ouzh ar voger uhel a rae penn uhelañ ar straed. Bras kenan oa ar vent anezhi ha hañvalout a rae bezañ an hini vrasañ en abeg da zibarded he difrouezhusted hag he diouer a gempennadur. E giz arrebeuri ne oa nemet ur stern gwele houarn strizh, ur gwalc'heris difaganet, un daol vihan, un armel levrioù ledan, ul letrin houarn ha teir c'hador er-maez a c'hiz. Follennoù sonerezh oa berniet en dizurzh war al leur. A blankenoù noazh e c'hoarveze ar mogerioù ha ne hañvalent ket bezañ bet plastret ; evit ar peurrest, e hañvale al lec'h bezañ dilezetoc'h eget annezet en abeg d'ar puilhder a boultrenn hag a wiadoù kevnid. Evit Erich Zann edo bed ar vraventez en ur c'hosmoz dec'hmegel diabel, anat.

An den mut, en ur ziskouez din azezañ, a serras an nor, a brennas ar morailh koad ledan hag a enaouas ur c'houlouenn da greskiñ gouloù an hini en doa degaset.

Da heul e tennas e viola eus e gostell preñvedet hag, en ur e gemer, ez azezas er gador a oa an nebeutañ diaes. Ne arvere ket al letrin hogen, hep reiñ an tu din da zibab hag o seniñ dindan eñvor, e 'm boemas e-pad ouzhpenn un eurvezh gant bommoù na 'm boa biskoazh klevet ; ha rankout a rae ar bommoù-se nodiñ dioutañ hepken. Dic'hallus eo deskrivañ o natur evit un den distuz war ar sonerezh. Un doare fogan e oa, gant arroudoù arreadek eus an hoalusañ, nemet e verzhen enno ezvezañ an notennoù strafuilhus a oa c'hoarvezet din klevout er gambr a-us e degouezhioù all.

Dalc'het 'm boa koun eus an notennoù moustrus-se hag alies edont bet o vouskanañ hag o c'hwitellat en un doare direizh e 'm diskvouarn ; neuze, p'en devoe ar soner lakaet e wareg war al leur, e c'houlennis outañ ha gallout a rafe dezerc'hañ un nebeud anezho. Evel ma oan o stagañ gant va goulenn, an dremm a c'havdroadeg roufennet a gollas an habasketed borodet a oa bet ganti e-pad ma sone hag a hañvalas diskouez an un meskad eveek a gonnar hag a spouron a 'm boa merzhet pa oan bet ouzh an den kozh evit ar wech kentañ. Douget e voen, e-pad ur mare, da vont dre gaer, hep damantiñ re da froudennoù ar gabac'hted ; klask a ris zoken azbevaat stad askre strafuilhus va ostiz dre c'hwibanat un nebeud eus ar bommoù a 'm boa selaouet en nozken. Hogen ne gendalc'his ket gant an emzalc'h-se e-pad ouzhpenn ur mare rak ar soner mut, pa anavezas an ton c'hwitellat, a zeuas e zremm, a-greiz holl, da vezañ disneuziet gant un dremmvez a oa penn da benn en tu all d'an dezrann, hag ez astennas e zorn dehou, hir, yen hag askornek, da herzel ouzh va genoù hag ouzh an drevezadenn c'hros. En ur ser e tiskouezas muioc'h c'hoazh e vrizherezh pa daolas ur sell saouzanet etrezek stign ar prenestr unel stignet, evel p'en dije bet aon rak un estrour bennak — ur sell div wech diboell rak uhel, diziraezus hag a-us d'an toennoù all stok outi oa ar galatrez, ar prenestr-mañ o vezañ ar savboent nemetañ war ar straed serzh, evel m'en doa ar porzhier lavaret din, ma veze gwelet en tu all d'ar voger war ar penn anezhi.

Sell an den kozh a zegasas din koun eus evezhiadennoù Blandot ha santout a ris, evel dre ur froudenn vennak, e 'm boa c'hoant da sellout ouzh arvestva frank ha badaouas an toennoù sklerijennet gant al loar ha gouleier ar gêr en tu all da benn an dorgenn na vezent gwelet, e-touez annezierion ar Rue d'Auseil, nemet gant ar soner chaker-se. Mont a ris etrezek ar prenestr ha sachet 'm bije war ar stignoù dister pa voe ar c'hambrou mut, fuloretoc'h c'hoazh eget a-raok, warnon adarre ; ar wech-mañ o treiñ e benn war-du an nor e-pad ma strive nervernek da 'm sachañ di a-nerzh e zaouarn. Heuget penn da benn gant va ostiz ar wech-mañ, e c'hourc'hemennis dezhañ va leuskel hag e lavaris dezhañ ez afen kuit da heul. Distardañ a reas e grog ha pa we-las va heug ha va feuk, e hañvalas e fulor distanañ. Adstardañ a reas e zorn distrizhet hogen en un doare karadek ar wech-mañ en ur va rediañ da azezañ. Da heul, gant un doare evezhiek, e treuzas ar sal trema an daol c'holoet a zilerc'hiadoù ma skrivas meur a c'herioù war-bouez ur c'hreion, e galleg amparfal un estren.

An notenn a roas din erziwezh oa ur galv d'ar c'houzañvusted ha d'an drugarez. Zann a lavare e oa kozh, unanik hag enkrezet gant aonioù iskis ha strafuilhoù nerval liammet ouzh e sonerezh hag ouzh traoù all. Plijadur en doa bet o welout e 'm boa selaouet ouzh e sonerezh ha c'hoant ma teufen c'hoazh hep teurel kont eus e vrizherezhiadoù. Met ne c'halle ket seniñ e gendoniezhoù strafuilhus d'un den all ha ne c'halle ket o gouzañv sonet gant un den all. Ne c'halle ket gouzañv kennebeur na ve stoket tra en e gambr gant un den all. Ne ouie ket e c'hallen e glevout eus va c'hambri a-raok hon diviz en trepas ha goulenn a reas ouzhin ha gallout a rafenn emglevout gant Blandot evit kemer ur gambr izeloc'h ma ne c'hallfen ket e glevout en noz. Evit a selle ouzh ar feurm, e skrive e oa evit kemer ar mizoù war e goust.

E-pad ma chomen azezet o tigejañ ar Galleg euzhus-se, e teuis da vezañ trugarezusoc'h ouzh an den kozh. Eveldon e c'houzañve poanioù korfel ha nerval. Ha studiañ trabedoniezh en doa desket ar vadelezh din. Ur son dister a zeuas eus ar prenestr e kreiz an didrouz (ar stalafenn a ranke bezañ o storlokañ gant an avel noz) hag, hep gwir abeg, e skrivas en un doare hogos ken feuls hag hini Erich Zann. Neuze, pa voe echu va lennadenn ganin, e stardis va dorn da 'm ostiz hag e kuitais evel ur mignon.

Antronoz, Blandot a roas din ur gambr geroch en trede solieradur etre rannioù ur prester kozh ha kambr ur paperer doujadus. Ne oa den ebet er pevare solieradur.

Ne voe ket hir amzer a-raok ma kavis ne oa ket Zann ken c'hoantek da 'm darempredin hag en doa e ziskouezet e-pad ma oa ouzh va c'hendrec'hiñ da vont da chom izeloc'h eget ar pempet solieradur. Ne c'houlennas ket diganin dont d'e weladenniñ ha pa weladenn e hañvale bezañ nec'het hag e sone lezirek. Da noz hepken ez errue kement-se — war an deiz e kouske ha ne zegemere den ebet. N'en karen ket muioc'h daoust d'ar gambr er grignol ha d'ar sonerezh strafuilhus a 'm dalc'he boemet en un doare espar. Ar c'hoant eveek oa ganin da sellout dre ar prenestr-mañ, a-us d'ar voger hag a-is, trema diribin diwel an toennoù hag ar c'horzennoù skedus a ranke emledañ aze. Ur wech e pignis d'ar galatrez e-pad eurvezhioù ar c'hoariva, pa oa Zann ezvezant, hogen serr oa an nor.

Pezh a zeuis a-benn d'ober a voe klevout sonadeg noz an den kozh mut. Da gentañ ez aen war veg va zroad betek ar pempet solieradur kozh, da heul e teuis da vout hardizh a-walc'h da bignat an diri gwigour betek ar galatrez vegek. Aze, en trepas strizh, dirak an nor vorailhet hag he zoull potailh mouchet, e klevis tonioù a 'm leunias gant un amgren andespizadus — amgren rak un darvoud displann hag ur c'hevriñ gourdrouzus. Ne oa ket en abeg ma oa hakr ar stenioù-se rak ne oant ket ; met peogwir e tougent froumoù na zegasent da goun netra war vout an douar hag e zrevezent, bep ar mare, un arvez simfoniek na c'halle ket bezañ sellet evel disoc'h

ur soner hepken. A dra sur, Erich Zann oa ur genezh e c'halloud feuls. A-feur ma tremene ar sizhunioù, e teue ar c'hoari da vezañ feulsoch, tra ma wiske mui ouzh mui ar soner kozh doareoù faezh ha tec'hidik, a oa un drouez gwelout. Hiviziken e nac'he va degemer, ne verne an eur, hag e tec'he diouzhin bewech ma kejem en diri.

Neuze, un noz ma selaouen ouzh an nor, e klevis gwic'hadennoù ar viola o kreskiñ en ur safar rouestlet, un diaoulerzh diroll en dije graet din diskrediñ war yec'hed brallus va spered ma ne vije ket deuet a-dreuz d'an nor sparlet ar brouenn eun e oa gwir an euzh — ar garm braouac'h ankevaot a c'hell ur mud hepken teurel, hag a sav nemet pa vezer en aon pe en enkreuz ar gwashañ. Meur a wech e skois ouzh an nor, hep respont ebet avat. Da heul e c'hortozis en trepas teñval, o kridennañ gant ar yenijenn hag an aon, betek ma klevis ar paourkaezh soner o lakaat e striv gwan da sevel eus al leur war-bouez ur gador. O krediñ ma oan e oa emouez da heul ur barrad semplañ ez adkregis da reiñ taolioùigoù klok ha da reiñ va anv war un ton sederaus war un dro. Klevout a ris Zann o strebotiñ etrezek an nor, a zivoraillhas din en ur grenañ a-benn va degemer. Ar wech-mañ e oa gwerc'hel ar blijadur en doa ouzh va gwelout rak e fas disneuziet a lugernas gant ar frealz tra ma kroge e 'm forpant e giz ma vez krog ur bugel e brozhioù e vamm.

En ur grenañ fromus e 'm redias an den kozh da azezañ tra ma sanke en unan all a oa e viola hag e wareg a-dreñv dezhi, dievezh, war al leur. Anoberiek e chomas e-pad ur pennad amzer, o hejañ e benn en un doare espar, hogen o hañvalout, en un doare diac'hinek, bezañ war selaou kreñv ha spontet. Da heul e hañvalas bezañ bet e walc'h hag, o tremen d'ur gador stok ouzh an daol, e skrivas un notenn verr, en he roas din hag e tistroas d'an daol, ma krogas da skrivañ buan ha dibaouez. An notenn a 'm aspede, en anv an drouez, hag evit va raneller personel, d'e c'hortoz el lec'h ma oan tra ma priente un danevell klok en alamaneg eus an holl varzhoù ha braouac'hoù e argade. Gortoz a ris ha kreion an den mut a redas.

Un eurvezh diwezhatoc'h oa marteze, tra ma c'hortozen c'hoazh ha ma kendalc'he ar follennoù skrivet terzhiennek gant ar soner kozh da emverniañ, pa welis Zann skrijal evel pa ve bet skoet gant ur stroñs euzhus. Evel reizh, edo o sellout ouzh ar prenestr stignet hag o selaou en ur grenañ. Neuze e tamfaltazis e kleven me ur son. Daoust ma ne oa ket ur son euzhus, met kentoc'h un notenn sonerezh gwall izel hag ur mil bell o regas da goun ur soner en unan eus an tiez amezek pe en un annez bennak a-dreñv d'ar voger uhel na 'm boa biskoazh gallet sellout en tu all dezhi. Kriz e voe ar gwered war Zann rak a-greiz holl e savas en ur leuskel e greion, e krogas en e viola hag e stagas da skiltrañ an noz gant ar sonadeg feulsañ na 'm boa klevet o vont e-maez e wareg nemet pa selaouen ouzh an nor sparlet.

Aner e vije deskrivañ an doare ma sonas Erich Zann e-doug an nozvezh spontus-mañ. Euzhusoc'h oa eget tra a 'm boa biskoazh klevet rak diwar vremañ e c'hallen gwelout neuz e fas hag e c'hallen merzhout e oa an aon krañ an abeg anezhi. Edo o klask ober un trouz ; mirout ouzh un dra bennak pe gas kuit un dra bennak : petra, ne c'hallen ket ijinañ, daoust ma santen na pegen braouac'hus e ranke bezañ. Boemus, ambreek, darfellek ez ae ar sonadeg, padal en ur virout betek an dibenn perzhioù ar genezh meur a anavezen e piaou an iskis a zen kozh. Anavezout a ris an ton — un dañs poblek hungarek feuls sonet er c'hoarivaou — ha soñjal e oa ar wech kentañ din klevout Zann o seniñ tonioù ur sonaozer all.

Ponner ouzh ponner, feuls ouzh feuls, ez ae gwic'hadenn ha hirvoudenn ar viola dizesper-mañ. Ur c'hwez iskis a rede ouzh ar soner hag emweañ a rae evel ur marmouz, en ur venel sellout pennfollet ouzh ar prenestr stignet. A-dreuz e vommoù diroll e c'hallen hogos gwelout gavdroadegoù ha bakanalioù difraezh o tañsal hag o troidellañ diskiant a-dreuz islonkoù a goumoul, a voged hag a luc'hed. Neuze e kredas din klevout un notenn skiltroc'h, dalc'hetoc'h na zeue ket eus ar viola ; un notenn sioul, ratozhiek, darvestet, goapaüs o tont a bell diwar-du ar c'hornog.

D'an ampoent, e krogas ar stalaf da storlokañ gant un avel yud noz a oa o paouez sevel er-maez evel pa ve bet o respont d'ar soner sot e-barzh. Viola rifadus Zann a yae dreist dezhañ o teurel sonioù na 'm boa biskoazh kredet bezañ ec'hodet gant ur viola. Kreñvoc'h e storlokas ar stalaf, divorañhet ma oa, ha stagañ a reas da flapañ a-enep d'ar prenestr. Neuze e torras ar gwer en ur grenañ dindan ar stokoù padus hag e redas tre an avel sklasek, o lakaat ar goulaouennoù da zaskal hag ar follennoù paper da sarac'hañ war an daol m'en doa Zann kroget da skrivañ e gevrin euzhus. Sellout a ris ouzh Zann ha gwelout e oa en tu all d'an evezhiañ ersellus. Edo e zaoulagad glas o tifoupañ, disked ha diwelus ma oant deuet da vout, ha deuet oa ar sonadeg pennfollet da vezañ un dirolladenn dall, diarzoug, disneuz na c'hallfe bezañ degaset da goun gant pluenn ebet.

Ur gaouad trumm, kreñvoc'h eget ar re all, a dapas an dornskrid hag en kasas etrezek ar prenestr. Dic'hoanag e heuliis ar follennoù nij met aet e oant kuit a-raok ma tiraeris ar gwerennoù diskar. Da heul e kounais ar c'hoant a oa bet din sellout eus ar prenestr-se, prenestr nemetañ ar Rue d'Auseil ma c'hallfe bezañ gwelet an diribin en tu all d'ar voged hag ar gêr oc'h emledañ dindan. Teñval kenan oa anezhi met atav e veze gouleier ar gêr o teñval ha spi 'm boa o gwelout e-touez ar glav hag an avel. Padal, pa sellis eus an uhelañ eus ar prenestroù talbenn-mañ, pa sellis tra ma traske ar goulaouennoù ha ma yude ar viola foll a-gevret gant an avel noz, ne welis kêr ebet oc'h emledañ en traoñ na gouloù, karadek ha lufus, o tont eus straedoù anavezet, met duder un egor anvevenn hepken : un egor en tu all d'an dec'hmeg, bev dre al lusk hag ar sonerezh hag hep par da dra ebet war an douar. Hag, evel ma chomen amañ o sellout, braouac'het, an avel a lazhas an div c'houlouenn er galatrez vegek

hen-mañ hag a 'm lezas dre se en un duder feuls ha didreuzus, gant ar reustl hag an diaoulerezh dirazon hag ur follentez diaoulek a-dreñv din.

Souzañ a ris en ur drabidellañ en deñvalijenn, hep gallout trekiniñ un enaouidenn, o flastrañ ouzh an daol, o troc'holiañ ur gador, o klask va hent erziwezh en ur doulbabañ davet al lec'h ma skrije an duder gant sonerezh stroñsus. Klask hon saveteiñ, me hag Erich Zann, a c'hallen ac'hoel, petra bennak a oa an nerzhioù enebet ouzhin. D'ur mare e soñjis bezañ bet spinet gant un dra sklasek ha skrijal a ris met ne c'halle ket va skrijadenn bezañ klevet dreist ar viola hakr-mañ. A-greiz holl, a-vaez an teñvalder, ur wareg bountet ha sachet foll a stokas ouzhin ha merzhis a ris e oan e-kichen ar soner. Bale a ris a-dastorn, steñval ouzh kein kador Zann ha neuze kavout ha hejañ e skoaz gant nerzh evit ma tistrofe d'e genskiant.

Hemañ ne respontas ket hag ar viola a gendalc'has da skrijal dilaosk. Fiñval a ris va dorn davet e benn, a oan gouest da baouez an hejadenn diarzoug anezhañ ha huchal en e skouarn e rankfemp tec'hout ni hon daou diouzh tra dianav an noz. Hogen ne eilgerias na ne sioulaas gant diboelegez e sonerezh dibaouez, tra ma hañvale aerfroudoù iskis, a-dreuz ar galatrez, dañsal en deñvalijenn hag en dourni. Pa stokis e skouarn gant va dorn, e krenis daoust ma ne ouezis ket perak — betek ma santis an dremm diflach ; an dremm yen skorn, reutaet, hep fiñv analañ, an daoulagad disked o tifoupañ en aner ouzh ar goulo. Da heul, dre ur marzh bennak, en ur gavout an nor hag ar morailh koad ledan, e splujis en un doar feuls, pell diouzh an dra e zaoulagad disked-mañ en deñvalijenn ha diouzh yudadenn vampirek ar viola milliget-se a greske ar fulor anezhañ evel ma splujen zoken.

Diskenn a-lamm, a-vordo, a-nij gant diri diziwezh an ti teñval ; skampañ pennallet dre ar straed strizh, serzh, kozh, ha distrantell he fazinier hag he ziez ; stlak ganin war ar pavezioù etrezek ar straedoù izel hag ar stêr kaniennheñvel, flærius ; o tielc'hat war ar pikol pont teñval a gas d'ar straedoù ha d'ar bouloardoù ledanoc'h, yac'husoc'h a anavezomp ; ken spontus e vez an holl santaoù-se ma padont c'hoazh ennon. Hag eñvoriñ a ran ne oa avel ebet, edo al loar en he c'hann hag holl c'houleier ar gêr o lugerniñ.

Daoust da 'm c'haskadennoù ha da 'm imboure'hadennnoù aketusañ n'on biskoazh bet gouest da gavout ar Rue d'Auseil. Padal ne 'm eus ket keuz penn da benn : pe en abeg da se, pe en abeg ma 'm eus kollet, en islonkoù en tu all da bep soñj, ar follennoù skrivet stank a vije bet ar re nemeto evit displegañ sonerezh Erich Zann.

*Troet diwar ar saozneg gant Malo Adeux*

## LAM-NE1-P3-HWARD1

*E doare H.P. Lovecraft...*

Danevell al letanant Hugh Wardinsky diwar-benn obererezh trede strolladig ar gompagnunezh «NE-1» (anvidigezh kuzhut) e-pad gwezhiad soudardel Lamantin an 21 Kerzu 1927.

[*Notenn an teulier : Al letanant Wardinsky, amprouet moarvat e-doug ar gefridi-mañ, zo bet bac'het abaoe. Ar vredezeion o deus ensellet outañ a soñj dezho (teul LAM-NE1-P3-HWARD2) ez eo tebek ez eo bet darn vrasañ an danevell-mañ gourc'hemennet kentoc'h gant ar follentez eget gant ar rikted hag an dezrann a zlefe azonañ teulioù a-seurt-se.]*

« Pa 'z omp bet skignet war ar brienn-mañ, pep tra a ziskoueze e vefe diaes hon c'hefridi. Koulskoude, mar hor bize gouezet petra a vire dimp al loar dort-hont-se hag aezhennoù flerius ar meurvor, en dije hon stummadur soudardel hon dalc'het un nebeud eilennoù nemetken war-du an dec'hadenn diskiantet hag an ankouazh trugarezus.

Kuzh oa amkan hon skignadenn. kevodet oa bet hon c'hompagnunezh en he fezh : tri strolladig a droadeion hag ur strolladig a armoù ponner. En holl, 168 den a zlefe gronnañ rann Reter ar gwenn en ur erruout dre an Norzh. Peurrest ar gêr oa bet lezet da gompagnunezhoù all. Dianav e chom an abeg ma labourer pep kompagnunezh disrann diouzh d'ar re all. Hiziv, e kav din splann o deus klasket hon uc'hurzidi, dre an touellerezh-se, tremen hebiou d'ur spontadeg ha d'un tec'hadeg yoc'hek.

War-dro dek eur noz hor boa kuitaet hon lojeizoù-soudard ha war-dro unnek eur hanter hor boa diraezet dre an hent ar poent skignat e Norzh ar gwenn. Emdolpet hon eus a-hed un tornaod ha gortozet an urzhioù. Evel penn strollad, aozañ a ris va fergont daou soudard e seizh skouadenn a c'hwec'h soudard pep hini. A-grenn e samman an diviz-se, amreizhfurm diouzh goulun aozadurel ar arme. Hogen dre ma añvale bezañ kèrel kefluniad ar gefridi, e kaven an disentez-se evit ar gwellañ. Sur on e vo gouest arsellerion an danevell da gompren an dibab graet ha da chom hep kontañ heuliadoù apokaliptek an obererezh-mañ evit muzuliañ ar gantrated anezhi.

Da hanternoz eo erruet war al lec'h ar c'habiten Marblehorn, hon penn strollad, heuliet gant un trevoud a seblante bezañ diaes. Bodet en deus al letananted ha komzet

ganimp. Ne c'hallfen ket danevellañ ar *briefing* resis, o c'houzout tenor trelatus an darvoudoù o deus heuliet. Soñj 'm eus avat ned eus tra ebet en deus seblanter bezañ nec'hus kenan evidomp.

Dindan un darsaverezh trevourel oa ar gêriadenn, ar soudarded ne oant ket deuet a-benn da sioulaat ha da gas en-dro an dispac'herion d'ar gwir, ha skuilhet oa bet ar gwad kentañ. Pep harzder a zlee bezañ moustret gant rustoni hag ar frankiz hor boa da beoc'haat ar geoded. Evit bezañ onest, soñj 'm eus on bet souezhet p'en deus hon aliet ar c'habiten da na ober prizonidi. N'eo ket boas korf ar Marines da skuilhañ gwad an Amerikaned. Koulskoude, priziet 'm eus n'o devoa ket an urzhioù, ha pa zeufent eus al laez, da vezañ arguzet. An emsavidi a dorre pouezusañ talvoudegezhioù hon bro, ne c'hallent bezañ sellet evel keodedourion hogen evel enebourion. Un abeg a-walc'h din ha da 'm breudeur armoù.

Chañs vat en deus reketet dimp hon c'habiten. Da heul omp aet en hent e strolladur laosk. Dre ar Reter pellañ eo tremenet hon strolladig, o heñañ an draezhenn. Da c'houde hon eus heuliet ar Su betek Innsmouth.

E-pad ar c'hardeur a gerzhed hon disranne diouzh ar gêriadenn n'hon eus bet netra fetis da gemenn. Padal, dav eo din diskleriañ amañ ar santad a ziazamant en deus perc'hennet hon strollad. An noz-mañ, avel an donvor a zouge ur c'hwezh flerius a vreinadur. Va soudarded zoken, genidik eus rannbarzhioù mor, oa hegazet gant ar c'hwezh-se. Evit lavarout ar wirionez, ha gant ar riskl da dremen evit un den trelatet, gwagennadurioù ar mor zoken, en diabell, ne seblantent ket bezañ gwirion. Ne c'hallan ket diskleriañ an kez santad, hogen an dour a hañvale bezañ stankoc'h, ha steredennerezhioù klañvidik al loar arwer ne raent nemet kreñvaat an trubuilh-mañ. Mitrouat a raemp ouzhimp a sellout ouzh ar meurvor.



Tost gant levez e eo e tizhomp fabourzioù Innsmouth. Rediet oamp da spiañ pizh pep kornig, arsellout pep logell kozh-kabac'h, hag hon selladoù ne oant ket mui troet ouzh ar mor daoust ma santemp e vezañs.

Goulo e seblante bezañ an tiez, ha dilezet abaoe dekvloaziadoù pe muioc'h c'hoazh. Soñj 'm eus bezañ bet oc'h emlarout edomp war ur vevnenn etre ar mor hag an douar, el lec'h resis ma teue da vezañ dic'hallus diforc'hekaat an div elfenn.

Goude bezañ gwiriet ne oa antell ebet ouzh hon gortoz ha ne oa adnerzh ebet war hon giz, ez eas hon strollad davet ar straedoù. Gourc'hemennet 'm eus da bep skouadenn da ziskenn war-du an talbenn porzh dre heuliañ straedoù kenstur. Va femp soudard ha me, ambrouget gant daou zouger strinker flamm hag un douger skingomzer, hon eus diskenet Orne street. Un ofiser skingomzer hor boa evit div skouadenn, gwiriet 'm boa neuze e vefe va skouadenn penn ar wezhiadenn, heuliet gant ur strollad harp ur c'hant metrad uheloc'h. Heñvel dra a voe graet gant va isofiserion.

Buan goude hon c'hentañ kammedoù diaes en Innsmouth, ur safar a dennadegoù a zassons en diabell. Anat o doa ar c'hompagnunezhoù all kejet gant un enebiezh, hogen honnez ne zlee ket bezañ pouezus dre ma oa an tennoù a-skign hag ar barradennoù un nebeud stank. Neoazh e kreskas hon evezhiañs ha treuzkas a ris dre skingomz un urzh da vezañ prest. Daoust na oa ket talvoudus ent wir, ez on kendrec'het he deus va mouezh sonn ha diarvar hon dinc'het, me ha va faotred.

Goude un dek vunutenn bennak a gerzhed war Orne Street, hon eus dihentet war Franklin Lane dre ma oa an hent berrañ evit mont e-tro an talbenn porzh. Dre se, e welemp ar meurvor e penn ar straed, war-dro ur pemp kant metrad dirazomp. Amañ e rejomp hon c'hentañ kejadenn gant an henvroidi, ha, rankout a ran e lavarout, dipitet e voemp un tamm pa oa kemennet dimp un taol-dispac'h gwadet...

Ur strollad a bemp den, kabelleoù teñval ha teuc'h warno, a yae war-raok dindan gouleier morlivet al Loar. O c'hammedoù, daoust dezho bezañ dibill, ne seblantent ket din bezañ nes hag o frimder oa ur meni hastidigezh amparfal. Ar straed kenserzh diouzhimp a dreuzent ha ne seblantent ket bezañ bet ouzh hon merzhout. Kemer a ris un analadenn ras, derc'hel war un heug degaset gant c'hwezh euzhus ar pesk hag huchal warno chom a-sav.

A-vec'h ma 'z ae ar sonioù eus va gouzoug, o doa troet an holl dud, reut ha difiñv. E-pad un nebeud eilennoù e kav din e parjont o sell warnomp, hag emlakaat a rejomp da redek war hon tu. Gourc'hemenn a ris da'm sourdarded da dennañ.

Degemeret mat e voe tarzhadennoù an armoù tan. Peurzisheñvel oa gouleier tomm an tennoù diouzh ar skedusted wer-glas a zevere eus al loar hag eus ar mor, hag

huchadennoù ar boledoù o freuzañ an aer a dorras an didrouz stank hon bouzare abaoe div eurvezh diwar bremañ.

An diskeudoù a emziasac'has didrouz, hep garm pe glemm. Koulskoude, an dirolladur a zrouz a zassone c'hoazh gant gwander an diston anezhañ a seblante bezañ bet o tihuniñ obererezhioù amyac'h en trowardroioù. Trouzioù bouzar ha diboeñ a zaskrenas a-dreuz-didreuz adal diabarzh an tiez dilezet. Gwashoc'h c'hoazh, soroc'herezhioù gleborek ha birvilhet a seblante dont eus dindan hon treid. Bez' hor boa ar santadenn e oa ar straed-mañ ur plankenn koad bresk lakaet war un islonk dindanvor ha sujet da vordilh loened spontus.

Unan eus va faotred, ar soudard Grovers, a sachas va evezh hag a ziskouezas din un ti trouzusoc'h eget ar re all. Hep ket a var, perc'hennet oa an ti-mañ. An nor a zistrujais ha gourc'hemenn a ris da 'm soudarded da vont e-barzh o tennañ a wel war an holl zalc'herion a c'hallfe bezañ.

E-barzh an ti, e seblante krignet an arrebeuri gant ar glebor, evel pa vijent bet o chom en dour mor. Gouzedoù holenek a drese arabeskennoù war ar paper moger louet. Diaes oa dimp analañ, ken glebennek oa an aer. Kouezhet oa ar speurennoù a zis-ranne ar pezhioù disheñvel, distrujet oa bet ar sel hag ar pezh en dije bet ranket bezañ un eil solieradur oa ur grugell atredoù glebiet hag a-stlabez war an adraoñ. Klor koad ur skalier hepken a chome e-kreiz ar pezh, chin, oc'h uhelaat e goulo ar raksal krinet-mañ.

An trouzioù bouzar a glevemp en diavaez oa hollvezant amañ, hogen un arvez luskel o doa kemeret. Kavout a rae dimp e klevemp kalon an ti-se o lammat hervez ul lusk harpet gant an takennoù dour a gouezhe e poullou war al leur. Daoust d'ar cholori glebennek-mañ, ne oa den ebet amañ. En urzh ez ejomp er maez a-raok mont davet Franklin Lane.

En diavaez, un dra bennak en doa kemmet. Ken flærius oa an aer atavd, hogen ne oa ket ken goulo ar straedoù. Dre guzh, diskeudoù a emzilec'hie, a rikle etre al lochennoù dismantr. Hiboudoù gros a emfifile davet hon taboulinoù skouarn. Soñj 'm eus bezañ bet o verzout ne oa garloc'henn sañset denel ebet a vije bet gouest da eztaoliñ sonioù evel ar re-mañ.

Ar gêridi eus Innsmouth hor boa lazet oa bepred war al leur. Unan anezho, war e dremenvan, a fiñve c'hoazh hag a wee war an douar. Tostaat a rejomp eus e gelan, ul lagad evezhiekk laosket war an endroioù gourdrouzus. Lagadoù hon spie adal kornigoù teñval ar straedoù. Ne vefemp bet o kantren er straedoù-se evit netra.

Ar soudard Shallows a droas troad korf gliziennek hon enebour o vervel, en ur e ziskouez da gouleier sklal al Loar, hag a laoskas un huchadenn diratozh a-raok souzañ

en un taol.

Ne gredan ket e vije bet un dra, ha pa vije bet an aergelc'h mefistofelek a dorfed enep natur ma oa bezet Innsmouth, o c'hallout hon prientiñ d'ar pezh a weljomp neuze.

An den, mar bije tu da envel ar boud-mañ un den, oa pourvezet gant un dremm hurlinkus. N'en doa koulz lavarout elgezh ebet. Eus e dal koagennek e tifluke daoulagad divent, boulek, glebennek, digoret ouzh al loar. E fri, munut ha kompez, a laoske da ziruilhal div wazhennig du ha breinus davet ur genoù kigek e vuzelloù. E groc'hen a seblante emziframmañ a-dakadoù evit reiñ plas, du-mañ du-hont, da galedennoù luc'hus hag arwer. Moal oa an den hag e zivskouarn diskaret a zaou vroñsador taniennet.

Hogen an euzhusañ oa ar vuhez displek ha rukunus a enaoue c'hoazh ar maskl a wallhunvre-mañ, ur weledigezh dizenel. Gouzoug al loen a zaskrene hag a virvilhe gant diroll hervez luskadoù dianav da vab den tra ma troe e zaoulagad a bep tu hep malvenniñ morse. An euzhusted toc'hor-mañ a zegase koun dimp d'ur pesk o vervel war ar briell kentoc'h eget d'un den a-dal d'ar marv. N'eo ket ken dre druez hogen kentoc'h dre heug e tispakas ar soudard Forrows e venveg brezel hag e lojas un ten e klopenn an euzhvil.

A posteriori, e kav din anat e oa amoet al lazhaden-mañ. Heskinet gant al loen fallakt, ne oamp ket mui prederiet gant an oberiantiz a yae o vrasaat en dro dimp. Franklin Lane ne oa anezhañ bremañ nemet sourradennoù, grozmoladennoù ha luskadoù kuzh. Ne 'm eus graet netra evit paouez jestr ar soudard Furrows, war va chouk e samman ar fazi-mañ.

Pa darzhas klopenn al loen o skignañ ur c'hwezh flaerus dourel, ur son a skornas hon eskern.

Ur meni mouezh gros gleborek, liesaet dre lies kantad, a zassonas tro dro dimp. Eus pep lec'h e lammas diskeudoù gant drailherezioù, tammoù koat pe armoù all en o douarn.

Eus an tiez dilezet a-gent e tisonke bremañ ar pezh na c'hallan ket envel kabaduilherion.

Mard oa espernet dimp arvest o dremmoù divalav gant ar peñselioù a wiske neuz ar re gentañ, ar re a emdenne eus an dorioù hag eus prenestroù al lochennoù brein oa kalz nebeutoc'h gwisket. Un egar distrad a vuheze o dremmoù pesked tra ma sailhent warnomp evit hon bruzunañ.

An dougerion strinkerioù flamm, goude un dermadenn, a dufas teodoù hir un tan

glanaer war ar vandennad loened vil. Hep yudadenn a c'hloaz met bepred gant an trouzioù gouzoug gleborek-se, edo hon argaderion o weañ war al leur en ur c'hwezh euzhus a gig krazet. Hogen ne oa ket kig denel. Ar c'hwezhoù bevel ne laoskent mar ebet war natur wirion hon enebourion.

Hon armoù emgefreak a lazhe ar grouadurion hudur, hogen diniver e seblantent bezañ.

Goude un nebeud eilennoù o stourm taer, ar soudard Grovers a huchas. Gant ur sellad en en atersis hag ur biz yod krenus a ziskouezas war-du ar meurvor a stanke penn Franklin Lane.

Netra ne c'hallfe va lakaat da zisoñjal pezh a welis neuze.

Gant ur vouezh wrac'h e c'hourc'hemennis da 'm soudarded kilañ e-barzh an ti hor boa dilezet a-gent. Gouzout a raemp e oa goulllo hag e vefe aesoc'h da zifenn.

Gwarezet gant bommoù tan hon strinkerioù flamm, e kiljomp davet an ti dismantr a-raok mont e-barzh. Ouzh ar prenestroù hag ouzh an nor ez emlakaas va faotred, o tiskarañ kement a arsailherion hag e c'hallent.

Ra chomo o nerzh kalon en eñvorennoù. A-hed va buhez ez eñvorin, e kreiz ar wallhunvre yudek-mañ, dremm ar soudard Furrows, dirollet ha foll, sederaus gant e geneiled. O c'halonekaat a rae gant blejadennoù brezeler ha da viken e chomo e vouezh raouliet e 'm eñvor.

Mont a ris war-du kreiz ar pezh heuliet gant an douger skingomz Martins. Gourc'hemenn a ris dezhañ da vont e darempred gant skouadennoù all, strolladoù all, n'eus forzh piv.

An holl dalmoù a seblante bezañ leuniet gant adtrouzioù ha cholori ar brezel a washae an embreg.

Dre emsoñjal war an adtrouziou-se eo e riklas va sell davet an trap. Kuzhet dindan an atredoù, n'hor boa ket e welet ar wech kentañ. Lusket gant ur bondoug na c'hallfen ket displegañ, e kemeris ganin daou soudard hag ur strinker-tan eus an difennourion, hag e tigoris an trap. Sur oan e kavfemp orin an "emsavadeg"-se dindan an douar.

Ne fazien ket.

Sklerijennet oa an dan gant dourennadurioù arwer ha disliv a zasskede gant ur skleurenn amyac'h. Ar garreg, aet da vrein, oa strewet a gregin klañvidik. Al leur karget a zour mor a chuchue dindan hon c'hammedoù hag ar glebor a stanke hon gouzoug. Goude bezañ redet un nebeud metradoù en trepas-mañ ez eurujomp en ur vougev vrasoc'h met gant ur sel izeloc'h. Poan hor boa da chom war sav hag ar

strinker-tan, Marrow, a ranke mont war-raok, bolzek e gein, en askont d'e vent vras.

War lein c'hwezh ar pesk hag al louedadur, ur c'hwezh all a seblanten anavezout. Va c'halon a baouezas a lammat. C'hwezh ar gwad oa gant al lec'h-mañ.

Kregiñ a ris e brec'h Marrow ha gourc'hemennen dezhañ da dangwallañ an aer dirazomp. Hep kompren e reas se.

Gant gouleier ar bomm tan, ez emsplannas ar vougev. Ar weledigezh a heuz a emc'harana en hon luc'hsaeoù.

Ar strollad soudardel a zlee hon heuliañ oa amañ a-bezh. Muturniet, digroc'henet, peuliet, an izili a strilhe a wad ouzh ar mogeriou glebiet. Ar flamm a steuzie hogen ar welidegezh a chome. Skodeget oan, morlivet. War al leur e tisonkas unan eus wadarded, ur c'hlemmvan dispi a huchas unan all.

Dre vondoug, e tistrojomp war hon giz evit adkavout aer, zoken gwastet gant ar c'hwezh merdeadurel hudur-se.

Pa errujomp e sell da ziri ar c'hav, en en merzhjomp.

Noazh pilh oa. E skeur kleñvedek an dan-se e lugerne e furmoù distronket. War un dro, en hon gwelas hag en gweljomp. Seblantout a reas bezañ ken souezhet ha ni.

Mar galle an den hor boa lazhet un nebeud metradoù uheloc'h dellezout c'hoazh an anv-se, ne c'halle ket an kez boud bezañ anvet e-giz-se a-zevri. Skantennoù warnañ, e zaoulagad boulek a bare e sell warnomp hep malvenniñ. E baviou e doare eskell a emstigne, evel pa vijent war nes hon arsailhañ. Spontet hag heuget gant ar spes dianvadus, ne laoskjomp ket dezhañ ar chañs d'hon lazhañ hag e vosjomp an hiron. Hep trouz e kouezhas en e boull.

Un dra oa splann, e veizañ a rejomp en un koulz. E vezañs a dalveze e oa bet beuzet hon c'hamaladed. Hon unan edomp, hep skingomz, enkelc'hiet. D'ar strad ez ejomp pa zassonas mouezhioù gros d'hon divskouarn. Ar c'hrouadurioù fallakr a ziskene gant an diri.

En arvar d'an danou e redjomp hag ez emstekjomp ouzh skoilhoù blot ha gleb. Pep lec'h en dro dimp, e lamme an hironoù gadal, dindan un egar tarzhel dizanv.

Gwelout a ris va c'hamaladed bezañ draillhet gant dornioù na oant ket, diframmet gant dent dizanel.

Raktal pa greden e oamp kollet hag e oa strishaet va gweledva gant ar follentez, e tregernas an darzhadenn vouzar. Va enebourion a emlakaas difiñv. Un eil tarzhadenn

a zassonas, bepred en diabell, hag ar bagad a hiron a emstrewas en ur spontadeg pennfollet. Ober a ris va mad eus an diduell dic'hortoz-mañ evit dibab un hent ha redek, redek, redek.

Goude-se, e'm eus disonjet an darnvuiañ eus ar pezh a zo c'hoarvezet. Neuiet 'm eus e-barzh pibennoù, riklet en ur fank yud ha kredet emveuziñ un dek wech bennak. Semplet 'm eus, hag adkavet on bet an deiz war-lerc'h war an draezhenn, e Norzh Innsmouth.

N'ouzon ket c'hoazh a-enep petra hon eus stourmet. N'ouzon ket petra a 'm eus gwelet. Hetiñ a ran nemetken e vefe ar gêriadenn-se pulluc'het ar buanañ ar gwellañ. Pep tra a zle bezañ glanet hag an denelezh a zle disoñjal da viken ar pezh he deus gwelet amañ. Bez' ez eus traoù na fell ket da Zoue ma vint arvestet ganimp, talbennigoù du ar grouidigezh a seblant tec'hout diouzh E evezherezh. Abaoe an noz ifernel-se, e vevan en displegañ doan rak ar pezh a ruz e-tal ar meurvor.

E-pad eurvezhioù diwezhañ an noz, pa vez al loar, lodek da enebourion Doue, o spiañ ar bed kousket, ez adwelan ar pezh en deus hon bontet d'emguzhat e-barzh an ti milliget-se. Adwelout a ran ar pezh a ziskouezas din ar paourkaezh Grovers, hag en un doare, en en avian da na gaout da vevañ gant ar weledigezh-mañ engravet en e spered.

E penn Franklin Lane, e bommoù eon o vougañ ar meurvor, milionoù a grouadurioù skantennek a zibouke eus ar gwagennoù tousmac'hus hag a emstinke war gae ar porzhioù davet ar gêriadenn! »

*[Notenn an diellour : amañ e kemer fin danevell al letanant Wardinsky. An danevell-mañ, anat eo, zo emmi un toullad a zirollerezhioù hag hep mar, a sorc'hennoù. Da skouer, dezrevell a ra bezañ klevet gantañ an tarzhadennoù atahinet gant tarzhadur « karreg an diaoul », loet koulskoude ur miles diouzh porzh Innsmouth. Padal, renket eo bet el laez an diell-se ha seblantout a ra bezañ eus un dalvoudegezh pennañ dirak an uhelbennadurezhed...]*

Antoine Piers,

Va unan,

hep ul levezon disteroch,

hag hep bezañ biskoazh lennet e-pad eurevezhioù Howard Phillips Lovecraft.

Troet diwar ar galleg gant Hoel Mabe.

## Arroud eus *Supernatural Horror in Literature* a-zivout oberenn William Hope Hodgson

Dizingal a-walc'h he ferzhded stil, ec'hon avat he nerzh degouezhel a-fet dambredañ bedoù ha boudoù skoachet a-dreñv diavaez boas ar vuhez, eo oberenn William Hope Hodgson, anavezet hiziv kalz nebeutoc'h eget na zellez. En desped d'un tuadur da veiziadurioù trivliadel ha kendivizadel eus an hollved, hag eus keñver mab den gant hemañ ha gant e getpared, an Ao. Hodgson n'en deus moarvat nemet Algernon Blackwood a ve e goulz evit an doare sirius ma arwerc'h an angwerc'helezh. Nebeut a c'hell bezañ par dezhañ evit lakaat gousantout nested nerzhioù dizanv ha hennadoù gronnus euzhus dre zamvenegoù boutin ha munudoù dister, pe evit kennaouiñ santadurioù an tasmantel hag an anreol a-zalc'h ouzh rannbarzhioù pe adeiladoù.

The Boats of the Glen Carrig (1907) zo taolennet ennañ lies marzhioù yud ha douaroù milliget dianav evel ma tegouezh ganto dreistbevidi ul lestr goueledet. Ar gourdruez e gor e deroù al levr zo dic'hallus e zistremen, daoust ma c'hoarvez un diruzadur etrezek ar garantez hag an avantur ordinal war-dro an dibenn. Bihanaet eo ar gwered hollek gant an argeziad amzik ha falsromantel da haneilañ komz plaen an eitekvet kantved, hogen ar gouiziadur bageel don tre lakaet a-wel e pep lec'h zo ur barenn gempouezus.



The House on the Borderland (1908) — moarvat ar wellañ eus holl oberennoù an Ao. Hodgson — zo anv enni eus un ti distro ha brudet fall en Iwerzhon oc'h amparañ ur poent kengerc'h evit nerzhioù arallved hakr hag o herzel ouzh ur seziz lakaet gant ezreolderioù hiron blasfemek eus un islonk kuzhet dindan. Kantreadennoù spered an daneveller a-dreuz bloaziadoù luc'h a egor kosmek didermen ha Kalpaoù ar beurbadelezh, hag e zesteni eus distruj diwezhel koskoriad an Heol, a ampar un dra hogos diail el lennegezh skoueriek. Hag e pep lec'h amañ emañ diskelat ampartiz an aozer da zambredañ euzhadennoù amspis, e spi en ul loadur krañ. Pa na vije un nebeud touchadoù trivliadelezh voutin e vije al levr-mañ ur c'haseg a renk kentañ holl.


The Ghost Pirates (1909), sellet gant an Ao. Hodgson evel o peurglozañ un deirzaolenn gant an div oberenn meneget diagent, zo un danevell c'halloudus diwar-benn ul lestr gwalldonket ha tasmantet war e veaj diwezhañ, ha diwar-benn ar morziaouled spontus (tost denel o neuz, anezho spesoù boukanerion wechall moarvat) en arsaill hag en kas erziwezh d'an doneier etrezek un tonkadur dianav. Gant ar vailhoni war ar ouiziegezh verdeel bezant ennañ, ha diuz ampart damvenegoù ha darvezadoù o tambredañ euzhadennoù enkelat en natur, e tiraz a-wechoù al levr-mañ rennoù nerzh avius.

The Night Land (1912) zo un dezrevell hir mat (538 p.) a-zivout dazont pell didermen an Douar, a-benn daoulionoù a zaoulionoù a vloavezhioù, goude marv an heol. Danevellet eo en un doare amparfal a-walc'h, evel hunvreoù un den eus ar seitekvet kantved, kendeuzet e spered gant an enkorfadur anezhañ e unan da zont ; ha tarvet eo da vat gant ranezennegezh poanius, azlavaregezh, karantezegezh romantel danzeadel ha pegus ken na heuger, hag un argeziad d'un henlavar chinoc'h hag emsivekoc'h c'hoazh eget hini Glen Carrig.

O lakaat e penn kont an holl sioù anezhañ, ez eo c'hoazh unan eus ar galloudusañ pezhioù faltazi gañvus bet skrivet biskoazh. Ar skeudenn eus ur blanedenn varv, soubet en noz du, gant dilerc'hioù an denelezh tolpet en ur c'herndaleg metal bras divent ha gronnet gant nerzhioù a'n deñvalijenn euzhus, hiron, ha peurzianav, zo un dra nad eo lenner ebet evit ankouaat biken : Stummoù ha hennadoù eus ur seurt peurandenel ha dreist meiz — kantreerion ar bed du, diergerzh hag ankouaat gant mab den, en diavaez eus ar c'herndaleg — zo dambredet ha damzeskrivet gant un nerzh dreist lavar ; endra wisk dremm bro an noz gant he islonkoù hag he naoueier hag he zanveneziegezh o vervel ur spouron hogos santadus dindan bluenn an aozer. Hanter hent el levr ez emavantur an dudenn greiz en diavaez eus ar c'herndaleg war ur c'hilask a-dreuz douaroù marvhenet dizarempredet gant mab den abaoe milionoù a vloavezhioù — hag en e araokadenn c'horrek, danevellet dre ar munud, a zeiz da zeiz, a-hed leviou dreist meiz a zuder dreisteñvoret ez eus ur skiant a'n dirgenvan gosmek, a'r c'hevren dianalus, hag a'r gedal spouronet diail en holl skalfad al lennegezh. Pevarenn diwezhañ al levr zo lostek ur spont, hep na ve gwastet nerzh

bras an hollad avat. Levr da heul an Ao. Hodgson, Carnacki, the Ghost-Finder, zo ennañ lies kevelennoù hir a-walc'h bet embannet meur a vlovezh kent e kelaouennoù. A-fet perzhded e kouezh anat dindan live al levrioù all. Amañ e kaver un derc'h boas kendivizat pe gendivizatoe'h eus ar rizh "igounier difaziuz" — diskennad eus an AoAo. Dupin ha Sherlock Holmes, ha kar nes da John Silence Algernon Blackwood — o vont a-dreuz loadurioù ha c'hoarvoudoù gwall darvet gant un aergelc'h a "amguzhouriezh" vicherel. Un nebeud eus ar rannoù, koulskoude, zo direndael o nerzh, ha pourchas a reont alberzoù eus ar genezh dibar naouus d'an aozer.

H.P. Lovecraft  
Troidigezh gant Ronan Le Déroff



## Diglevet

«Unbekümmert, spöttisch, gewaltthätig –  
so will *uns* die Weisheit: sie ist ein Weib,  
sie liebt immer nur einen Kriegsmann.»  
Nietzsche, *Also sprach Zarathustra*,  
lavarenn o tigeriñ trede rann *Zur Genealogie der Moral*.

Sonerezh Erich Zann a voe klevet un deiz gant un den a veve nepell diouzh rann di an arzour. « But despite all I have done, it remains an humiliating fact that I cannot find the house, the street, or even the locality, where, during the last months of my impoverished life as a student of metaphysics at the university, I heard the music of Erich Zann ». Digavadus e chom ar straed, ar rann di, al lec'h ma klevas ur son eus ur bed dived, un « etre », en kasas pell diouzh e brederadennoù trabedoniel. « Thereafter I heard Zann every night, and although he kept me awake, I was haunted by the weirdness of his music ». Digavadus e chom ar son ha digavadus eo an doare da lakaat ar sonerezh d'emgavout ha da glokaat gant ar c'hleved. A noz da noz, a zeiz da zeiz e tizoloas hentoù treuz sonioù digredus. Ne oar ket petra a glevo e penn an ton, en tu all d'an nor, padal e kerzh war-raok. Heuliañ a ra ar son Diglevet, betek bezañ diglevadus.

Ur ger brav a gaver e galleg. Pa gomzer flour ar yezh-se, e teu sonerezh an amzer d'an divskouarn. « Inouï ». E dreñ a reer er yezhoù all en ur heuliañ ur ger ha ger heñvel. *Unheard* pe *unprecedented* e saozneg, *unerhörte* e alamaneg (« das unerhörte »<sup>1</sup>, skrivet gant Heidegger evit komz diwar-benn e zoare iskis da skrivañ ha pa ra dave da berzh diglevet lavar henc'hresian Aristoteles, Platon hag istorourion pe brederourion). Met e brezhoneg, mar digorer ur geriadur dre zegouezh<sup>2</sup> ha mar klasker ar ger galleg « inouï », e lenner : « **inouï** : dianvez, dijaoj, iskis, biskoazh kaeroc'h ; **c'est i** ! ur marzh ! biskoazh kemend-all ! ». Pell a-walc'h ez emgaver diouzh ster prim ha kent ar gerioù *Inouï*, *unheard* pe *unerhörte*. Padal n'eo ket diaes da glevout ar gerioù-mañ pa vezer souezhet, pe mantret. Met ar ger-mañ, klevet mat, a lavar kalz hag hir.

« Diglevet » a c'hallfe bezañ un droidigezh dereat evit an troioù-lavar-se, evel *inouï* pe *unheard*. Diglevet : evel ur vouezh na zeu ket a-benn da dizhout ar skouarn-mañ skouarn pe an den-mañ den. Diglevet evel un trouz beuzet dindan un all.

1. Martin Heidegger, *Sein und Zeit*, rann 7

2. Roparz Hemon ha Ronan Huon, *Dictionnaire Breton/Français – Français/Breton – An Here! Liamm*, 2002.

Digleuet evel ur sonerezh klevet ha komprenet trouzus pa n'eo ket.

Troidigezh Roparz Hemon ne glev ket pep son ha pep ster eus ar ger-se. Pell e vezer diouzh ar ster galleg, pe alamaneg, padal e weler mat un disrann etre ar pezh a lenner er gerioù hag ar pezh a gomprenner pa lavarer « Digleuet », « Encore inouï » pe « Inouï ». Met digleuet e c'hell bezañ ur vouezh klevet ha deuet betek ennomp evit ar wech kentañ. Digleuet a dalvez amañ n'eo ket bet klevet betek henn, n'eo ket bet lavaret c'hoazh. N'eo ket klevet pe n'eo ket bet klevet. Ar ger-se a ra gwelloc'h eget reiñ dimp da anavezout diforc'hioù pe gudennoù troidigezh ha komprenadusted eus ur yezh d'un all.

Ur goulenn eo ar ger-se, ur goulenn savet ouzhimp gant ar mouezhioù, komzoù, sonioù digleuet, peogwir ez int chomet pell diouzhimp pe peogwir ez int chomet dilavaret ma n'eo ket dibrederiet. An dibrederiet, an disoñj eo a chom da brederiañ. Met n'eo ket ur « chom » a chomfe a-gostez, a zilezfer. Ur « bezañ o chom » eo, ur « chom e ». Ar vezañs-mañ, diskouezet gant un ezvezañs, eo an « digleuet », a c'houlenn ouzhimp ha tremen a ray eus an didrouz d'al lavar, d'ul lavar sebezus betek ar spontus. N'eo ket bet ha n'eo ket klevet. Ha klevet e vo ? Ur goulenn savet gant an amzer eo.

« Evel just 'ta ! » a vo lavaret dimp gant lennerion aketus : an amzer a gennev gant al lavar, goulenner pe get. Al lavar eo, o vezañ perzh diforc'hus mab den, a ro dimp merzhadenn an amzer. Evel ma tiskouezas Aristoteles, al Lavar zo stuz gallusted pep merzhadenn a 'n amzer evidomp. Hag ar goulenn savet er ger-mañ zo troet war-du an dremwel roet da vab den gant al lavar, dremmwel an amzer da zont. Met arabat krediñ eo pep dremmwel hini an dazont. Un dremmwel a wel luc'hoù diwezhañ un heol tremenet aboe pell kement ha teñvalijenn steredet un noz dirazomp ha nad eo ket a-us d'hon pennoù evit an ampoent. Lavar hag amzer a ro dimp an doare da vevañ en dremmwel ma vevomp.

El linennoù tremenet dirak ho taoulagad hoc'h eus bet tro da glevout, da lenn, anvioù disheñvel roet d'an amzer da zont. Un dazont soliadet, rakwelet ha rakjedet. Hag un dazont nidiadel a zalc'h betek ma tegouezhimp dirazañ galloud souezh an dazont. Un amzer da zont nidiadel eo un amzer n'eo ket bet, n'eo ket hag a c'houlenn ouzhimp hag e vo. Er c'hontrol d'an amzer da zont soliadet, un amzer bet, o vezañ hag a vo. Anavezet, klevet ha rakwelet eo. Un dra digleuet evit an ampoent a c'hell genel en amzer dazont hag a c'hortoz da vezañ krouet. Un dra digleuet evel un nit digrouet ha dilavaret betek henn.

Met arabat krediñ e ranker disoñjal souezhusted an digleuet pa gomprenner ster ar ger-mañ. Souezhus oa lavar Sokrates en Atêna ar Vvet kantved kent J.K. dres peogwir e oa digleuet betek henn. Un atênian ne c'halle nemet bezañ souezhet,

mantret pa gleve : « Gwelloc'h gouzañv an direizhder eget e ober. » Dres ar pezh a zisplegas Hannah Arendt en he levr *Life of mind*<sup>3</sup>. Sokrates a voe un trouz bouzarus evit an atênianed. Met ne voe ket nemet displijus an trouz-se : a-zreist ar meizus e komze Sokrates, met ivez adalek gallusted meizañ ar yezh henc'hresianek<sup>4</sup>.

Ar ster staget a ziskouez n'eo ket prest ar yezh, yezh an dud, mar klevet ha mar komprenner ar ger evel ur ger « souezhus » pa 'z eo « digleuet ». Met gervel a ra, goulenn a ra da vezañ klevet : klevout dre zreist-klevout, dre sellout kement ha klevout pelloc'h ha bremañ evit bremañ.

Un azon eo ar souez. Al lavar a zoug an azon-se. Petra a fell d'un den ober el logos, el lavar, setu petra a ziskouez an azon kavet e gerioù ha komzoù an dud. Pe petra a ra el lavar ha penaos e vev el lavar. Hag alies tre eo ur vuhez a aon, mantret dirak un dazont nidiadel a zirenk raktresoù un dazont treset diwar un amzer vremañ a vez heklever an amzer dremenet. An daou zarempred gant al lavar a gennev. An darempred gant an digleuet a ziskouez dimp an darempred hag ar sell ouzh al lavar.

Alies kenan e vezer o klevout tud mantret ha fuloret dirak komzoù ha lavarennoù, ken digleuet eo o son, o stumm kement hag o ster. Arabat mont re bell a vo lavaret dimp. Arabat bezañ re feuls gant al lavar, e zistruj a rit. Arabat krediñ eo roet al lavar evel m'emañ. Arabat krediñ eo difiñv al lavar ha ne fiñvo ket betek dibenn ar bed. Al lavar n'eo ket roet. Da sevel e vez bepred. Ne chomas ket diseblant ar yezh gant Aristoteles pe Thoukudides. Un diaester eo komz a-zivout ar beziad, un diaester all eo e gompren. Ar gomprenidigezh-se a c'halv un digleuet evit envel un diwelet diwel ha digomprenadus evit lavarou 'zo.

War o lec'h ne veze ket komzet an henc'hresianeg evel ma rae pep atênian pe megarian en a-raok : Gramadeg, geriaoueg, krouidigezh a voe kaset ha degaset betek gallustedoù uhelañ al lavar ganto. Ur yezh nidiadel e voe. Feulster, eleze o lavar.

Gwendal Piégais

3. Hannah Arendt, *Life of Mind*, diechu.

4. «Gallusted meizañ ar yezh» a lavarer «Logos» en henc'hresianeg. Pell tre e vezomp gant hon gerioù diouzh ster prim gerioù Sokrates.



# NIDIAD


*Kelaouenn lennegel trimiziek.*

Kadoriad : Gwendal Piégais  
Sekretour : Malo Adept  
Teñzorier : Hoel Mahe

**NIDIAD BREIZH**  
33 straed Lorraine  
44000 NAONED

*Kasit ho chekennoù (e gourc'hemenn NIDIAD) da :*  
**NIDIAD**  
57 straed La Grande Haie  
44119 GREGAMP AR FEUNTEUNIOU  
(GRANDCHAMP-DES-FONTAINES)

Priz reel : 5€  
Koumanant bloaz, Breizh : 15€  
Koumanant bloaz, estrenvro : 16€  
Studierion, dic'hweleion : 12€  
Aozadurioù sevenadurel, levraouegoù, kevazheoù ha strollezhioù : 21€



*Darempred :*

**nidiad.gwe@gmail.com**